

# SKOAZELL KEAV 2019

Gouzout a reomp ne zesker ket ur yezh dre heuliañ kentelioù nemetken, hag e ranker lakaat anezhi da vevañ er-maez eus metoù ar Skol-Veur, pe ar greizenn stummañ. Gouzout a reomp ivez pegent talvoudus eo evit ar gelennerien brezhoneg kenderc'hel ingal da studiañ ar yezh, dre heuliañ devezhioù-studi ha stajoù hiroc'h lec'h ma c'hellont gwellaat o barrezhioù, ober anaoudegezh gant brezhonegerien all, divizout war o micher, o skiant-prenet, bevañ ur sizhunvezh pe ouzhpenn e brezhoneg penn da benn. Ken gwir all eo evit an holl re a vez o labourat e bed ar skolioù, kasourien, ATSEM...

Evit skoazellañ studierien Master 1 ha 2 ar c'helenn divyezhek en o studioù, ar gelennerien, ar gasourien hag an ATSEMou, ha kement hini o labourat e metoù ar c'helenn divyezhek eo prest KEAV d'ober dezho un distaol a 110 euro war briz ar sizhunvezh staj heuliet e KEAV war o amzer vak ha war o c'houst.

## Neuze :

- studierien M1 war ar brezhoneg 240-110=130 €
- kelennerien brezhoneg ha Master 2 war ar brezhoneg ha tud all o labourat e metoù ar c'helenn brezhoneg 280-110=170€

**Evit ma c'hellfemp heuliañ gwelloc'h ar goulennoù skoazell, e c'houlennomp diganeoc'h leuniañ al lodenn amañ dindan. Da gas da keav@keav.bzh**

-----  
Anv ..... Anv-bihan .....

Chomlec'h .....

Kêr ..... Kod-post .....

Pellgomz ..... Postel/lekpoz..... @ .....

Anv ha chomlec'h ar skol m'emaoc'h o labourat .....

-----  
Anv ha chomlec'h ar skol-stummañ m'emaoc'h o studiañ .....

## STATUD

Kentañ derez  Eil derez

Kelenner ar skolioù  Kelenner eil derez  Gwazour tiriadel  Kasour

Publik  Katolik  Diwan  Un aozadur all (resisaat : .....)

## Skoazell arc'hant digant KEAV evit ar prantad-mañ :

Kentañ sizhun (7 – 13 a viz Gouere)  Eil sizhun (14 – 20 a viz Gouere)

Sammad : ..... €

Disentez Kuzul-Merañ KEAV : Goulenn degemeret  Goulenn nac'het

**Deiziad ha sinadur Prezidant KEAV**